



C'hoari al livioù

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit Piv ?

Adalek 4 bloaz

Dafar

gant kartoñsoù a-bep-seurt liv, livioù anavezet gant ar vugale

Doare da c'hoari

1 – evit un 20 bennak :

deskiñ ur ganaouenn aes a implij al livioù

2 – doare da c'hoari :

ar vugale `zo war ur c'helc'h , ur c'hartoñs liv dirak pep hini.

Lakaet e vezont da dreiñ betek ma vo lavaret gant rener ar c'hoari :

« anv ul liv » + « azezit » ; da skouer : « melen, azezit !»

ar vugale o deus melen dirazo a azez ; d'ar re ne reont ket e vo roet ur c'hastiz, da skouer, ur spilhenn staget ouzh ar stammenn.

Ur wech reizhet, e sav ar re azezet hag e tro ar c'helc'h en-dro.

- Goude 5 tro e vez cheñchet rener ar c'hoari.

4 – doare all da c'hoari :

evit ar re goshoc'h, hag o deus gwelet dija ar fiñvadennoù, ez eus tu ober ar memes c'hoari nemet, e-lec'h lavarout atav « azezit » e vo graet gant urzhioù all : « troit », lammit », « kluchit », « redit » hag all.